

**Rolland** (Lanneanou 1862 – Gwerliskin 1940)

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Red eo gouzoud ar galleg evid kompren da vad.

**Taolenn**

Rolland : Chañson nevez war sujed an dekorasionou dimeuz an dud yaouank

Dizano :Kimiadou eur martolod a Vreiz

## Chañson nevez war sujed an dekorasionou demeuz an dud yaouank

*War don a zezirfoh.*

Paotred yaouank va hontre, preparet ho moñchou  
Deuz kostez ho jiletenn stagit ho chadennou  
Leket d'ober gol vontr en kreh ho chiletenn,  
Dindan ho kazel eur hol gorn, en bordig ho chupenn.

War ho roched kazi brein, leket eur holier gwenn  
Hag istribill deuz ho koug lezit ho kravatenn ;  
Leket sira ho poutou a-raog mond deuz ar gêr,  
Ha na les't an didalvez ahanoh hen ober.

Eur boutou war glochedou peotramant war elastik,  
Eur loerou gand jarretier, se 'zo manifik ;  
Laket eur holier voulouz war gorre ho palto  
Ha dindan he baskekedenn, leket ho kodello'.

Mez gand ho mouchouerou, 'maint dija rampliset  
Diou gol guz rankfet ober, evid beza komplet :  
Arabad e vo kaoud diou regenn votonou  
Na foeltr kolier ebed ken deuz ho chiletennou.

Ho pragou apon-bihan, peotramant en toull giz,  
Pe mar kerit en braget, pa ne gwir 'mañ ar hiz ;  
Eur yalh, eru horn à la mode, eur voestad alumetez,  
Ar hant, eur porte-monnaie,añfin eur vizetez.

Gra da varo 'raog ma 'po, rann da vleo, mihieg,  
Da dok war gostez da benn, setu te paotr c'hweset ;  
Allom, tra-walh a zo, ne vank netra dit ken,  
Bros da zillad ha parti bremañ en pep tachenn.

Mez setu-te ankeniet sevl poueziou da vond :  
Da gontell 'mañ ket e kol, diwall mad deuz da gont ;  
Rag ma n'az pez kontell 'bed, emberr pa'h i da goan,  
Dirag da vestrez 'po mez o tond da houl unan.

Bremañ kenta mad a ri 'vo klask da gamarad  
Evid moned asamblez d'eur padron bennakad ;  
Set 'maoh o haloupad bep sul d'ar pardonio',  
Evid tachoud anavezoud kalz a verhed faro.

Da vestrez a zo dija da hortoz er pardon  
Ha pa welo ahanout e trido he halon,  
Pa gonsidero ennout, e vo joaiuz ha yê  
Evel ar bleun er spern gwenn, en komañsamant Mae.

Pa zeli mad deont-hi, 'ouleo he herhenn,  
Eur foulard deuz ar haerra pe eur pezh kokardenn.  
Eur holier dantelezet ha kalz a dreo all c'hoaz :  
Eur chadenn aour pe arhant, medalenn hag eur groaz.

Pere 'zo prenet dezi 'vid merk an amitie,  
Gand eur pod c'hwezet bennag, gwisket eveldout-te ;  
Ne ouie petra, allaz ! prena d'e vestrez koant,  
P'hini ree goap anezañ, goude koll e arhant.

A-benn eun div eur goude m'eh eas, leun a esper  
Da gonta dezi va ide, dre gomzou saluter ;  
Ma oam bet tost da deir eur ha konta on doare,  
Gand ar blijadur vrasa an eil ouz egile.

Humblisite va mestrez, a zo sur heb he far,  
He furnez, he elokañs, a ra dezi he gloar ;  
He harantez, modesti, he zalant, he hened,  
He douster, he demarchou, sklêrijenn he spered.

Teneridigez he halon, he sell lemm ha persant,  
A lakeas gand ar joa va halon flamboyant ;  
Hi lakeas va halon leun a esperañs vad,  
En eur akordi dezañ, gand joa vraz e vennad.

N'eus ket a-walh a gomzo, 'barz en lañgaj breton  
Da zepegni ar charmou danveez va halon,  
O tond d'ar gêr ahane, goude beza roet  
Ar pouvoar da Gupidon, d'am derhel chadennet.

Me 'bed an doueez Mineri, ar roue Salomon,  
Ar seiz den fur deuz ar Gres, komandet gand Platon.  
D'ïñspira nerz ha kouraj, fermete d'am mestrez,  
'Vid tachoud en em derhel en limit ar furnez.

Rouanezed ar goantiz, Diane ha Cleopatre,  
Delhet dezi he hened gand eur gwir garante' ;  
Neptun, Mars hag Appolon he mesajer Mercur,  
Ma rekommañdet dezi, deuz a-berz an Natur.

Terpsikor, Clio, Crésus, Cicéron ha Rhea,  
Rhut ha merh hena Jozef, hag ar chast Suzanna,  
Gravet dezi en he halon imaj ar burete,  
Rentet dezi gand ar boneur, fleurenn ar chastete !

Bremañ me 'bed Jupiter, tad an oll doueo',  
Da helloud rei da entent da geemnt e gleve,  
Penaoz ar hompozeri yaouank 'zo eur spered dister,  
Domisil a Gwerleskin, mab eur hantonier.

'N-eus kompozet anezi 'barz ar bloavez prezant  
Unan ha pevar-ugent goude an triweh-kant ;  
Evid eksplika ervad da gement e lenno,  
C'hweh mil eiz-kant pevarzeg deiz 'm-eus he zervezo.

# Kimiadou eur martolod a Vreiz

Chañson nevez

*War don :An droug-hirnez (le mal du pays) Setu ar flik a flot.*

Bretoned, me ho ped, didostaet da gleved,  
Eur himiad truezuz, eun adieu trist-meurbed  
A ra da genvroiz kent moned d'ar brezel  
Eur martolod yaouank, maget en Breiz-Izel.

An eiz warn-ugent a viz Mae, me 'oa en faksion  
War hent ma batimant 'barz er rad en Toulon,  
O hortoz partia 'vid mond d'an Itali.  
War-benn tri deiz goude, e tleem ambarki.

Me 'gred e oa tremenet an eur a hanternoz  
Ha ma hamaraded 'oa eet da repoz ;  
Net ra ne drouble neuze ar silañs euz an noz  
Med ar mor o vurmuri gand eur vouez rust ha groz.

Ma daouzorn a oa oh harped war ma harabinenn.  
Dindan ma zreid ar mor braz hag an Neñv 'uz d'am fenn ;  
Euzi 'ran va mignoned pa deuan da gompren  
Ne vez 'tre 'n den hag ar maro nemed treuz eur plankenn.

Pa 'n em welis ma-unan war bont ma batimant  
Hep test deuz ma glahar nemed ar firmamant  
Me 'gomañse hirvoudi gand glahar an anken  
Pa deuas da zoñj din a barrouz Trabrien.

Ma daoulagad 'oa troet a-du ar vilajenn  
Leh ha 'm-oa da genta gwelet ar sklêrijenn ;  
Ha pa deuis da zoñjal em herent hag em bro  
Gand an dour euz ar mor 'n em veske ma daero'.

Abaoe an devez fatal am-eus ranket kuitaad  
Ha dond da gimiadi deuz ma mamm ha ma zad.  
Beb noz, pa ven kousket em huñvre o gouelañ  
Hag o soñjal 'n o glahar noz ha deiz e ouelan.

O ! devez leun a hlahar, a zizesper c'hwero,  
O-devez deplorabl ha karget a gañvo',  
O kimiadi ankeniuz ha glaharuz-meurbed.  
Me 'mo soñj ahanout keid a vin war ar bed.

Gand ma herent ar gêr ema nehamant.  
I 'ra ma oll chagriñ ha ma brasa tourmant ;  
Penaoz annoñsi da 'h an bremañ d'ar brezel ?  
Aon 'm-eus d'o lakaad gand an neh da vervel.

Pa glevont kement-se a-devont<sup>1</sup> kalonad  
Gwasoh 'vid an devez a rankis o huitaad.  
Hag i 'devo kouraj a-walh 'vid galloud suport  
Heb ma ranno o halon gand eur helou ken kri'.

Mez gra em flas, ha lar dezi, dre da zon,  
Derhel soñj da viken demeuz e wir mignon,  
An hini<sup>2</sup> 'zo, allaz ! pell deuz a Vreiz-Izel,  
En eur lestr, war mor foetet gand an avel.

Pa vin en Itali, en-kreiz ar hombajou,  
'Kreiz an tan, ar mitraille ha kroz ar hanoniou,  
Neuze eo e teuo ar muiañ da zoñj din  
Deuz an amzer euruz 'zo nijet pell diouzin.

Mar deu din da vond tizet gand eur bouled treitour,  
Hag achui ma deziou en eur vro estrañjour,  
'N eur gouezañ d'an douar c'hoaz, kent evid mervel,  
Ma daoulagad a droio war-zu Breiz-Izel.

Ma daoulagad a droio war-zu Breiz-Izel,  
Da lared d'am herent e adieu eternel,  
Da lared d'am mignoned an adieu diweza,  
Ha kent ar boneur d'en em weled 'barz ar joa.

Mar welfet eun deiz, 'n eur lenn ar gazeto',  
Ma ano, siwaz din, war bultañ ar maro,  
Kerent ha mignoned, c'hwi 'laro gand glahar :  
« Gras dezañ digand Doue da repoz 'barz ar hloar. »

Kent evid finisa, goulom digand Doue,  
'Vid ar martolod kêz, bep sort prosperite ;  
Pedom a wir galon Roue an armeou  
D'hen prezervi en-kreiz kemend a dañjeriou.

Ofrom c'hoaz on veuiou da Steredenn ar mor  
'Vid an oll soudarded deuz on bro gaer Arvor ;  
Goulom gand koñfiañs, pedom i gand ferveur  
Da bellaad dioute peb gwall-chañs ha gwalleur.

Rentom meuleudigez da arme gaer ar Frañs,  
D'on priñs ken jeneruz ha leun euz a vaillañs  
Ar re<sup>3</sup> 'guita o bro 'vid mond da gombati,  
Evid iñdepañdañs oll bobl an Itali.

Kanom bremañ 'n eur vouez, kanom toud assemblez  
Ra vezint enoret ha meulet da jamez ;

---

<sup>1</sup> a devont: o-devez.

<sup>2</sup> An hini : Pehini, er skrid orin.

<sup>3</sup> Ar re : Pere, er skrid orin.

Kanom 'ta, Bretoned, deuz foñs on halonou,  
Gloar hag enor d'ar Frañs, ivez d'on armeou !

Neb en-desu kompozet ar zon-mañ penn-da-benn  
'Zo ganet ha maget en parrez Trabrien,  
En-deus he hompozet war an d'he hana,  
Kanit hi 'ta, Bretoned, 'vid 'n em divertisa.

*(Ano skrivagner ebed. Sur ez eus kaoz euz brezeliou en Italia gand Napoléon III evid divenn ar pab).*